

DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINETRÉCITS DE CONFINÉS

Abaoe penn-kentañ ar bac'hadur e kemeran amzer d'ober tout an traoù ne c'hellan ket ober da gustum:

- Desket em boa penaos fardañ bara, ober a ran anezhañ bep sizhun! (Pa n'ez eus ket berrenn bleud ha goell evel-just...)

- Distlabezet em boa ar ranndi, didoueziet em boa an dilhadoù, al levrioù, ar c'hentelioù... Pegen brav eo ar ranndi! Met bremañ, re zistlabezet eo an traoù, ne adkavan netra ken!

- Gant deskidi ar skipailh SKED live 2 e flapomp e brezhoneg dre bellgomz, en em sikour a reomp evit ober al labour-noz... Ha c'hoarziñ a reomp kalz ivez!

Bep Lun da c'hwech eur hanter e reomp ar gentel brezhoneg gant Armelle dre visio. Kendalc'homp deskiñ brezhoneg e-pad ar bac'hadur memes tra!

- A-drugarez d'am mamm-gozh em boa desket pleustriñ mekanik gwriat dre Skype (ur vamm-gozh geek eo). Prest on ober maskloù!

- Ma mignon zo en em treuzfurmet e kelenner krossfit, ret eo din ober sport bep deiz, start eo !

- Lennet em boa levrioù e spagnoleg ha gwelet em boa Lucky Luke ha sekred-kegin e brezhoneg (arabat koll ar yezhoù e-pad ar bac'hadur!).

Mall zo zo warnon mont er maez en-dro evit adkavout ma c'herent-dost hag adober traoù a blij din, met war un dro, un tamm aon am eus peogwir e vo evel kent. Goanagiñ a ran goude ar bac'hadur emañ o vont an dud da deurel evezh ouzh ar re all. Ma vo kirriek an holl dud e tremeno mat an traoù. Ret eo gwareziñ hor c'herent-nes met ar-re all ivez.

Mélissa (live 2 - SKED)